

DIPLOM BROADEL AR BREVED

ESTEZ 2019

ISTOR-GEOGRAFIEZH DESKADUREZH MORAL HA KEODEDEL

Rummad hollek

Padelezh an amprouenn : **2 eurvezh**

50 poent

Kerkent ha roet ar sujed deoc'h, sellit hag-eñv eo klok.
Er sujed-mañ ez eus 7 pajennad niverennet eus 1/7 da 7/7.

DIWALLIT : Stagadenn ar bajenn 7/7 zo da reiñ gant ho kopienn.

Difennet eo ober gant geriadurioù ha jederezhioù.

Poelladenn 1. Dielfennañ ha kompren dielloù istor (20 poent)

ISTOR - Europa, un takad meur eus ar brezelioù total

Diell 1 : Kelc'h-lizher⁽¹⁾ prefeti polis Pariz o reiñ urzh rafl ar « *Vel d'Hiv* » evit ar 16 hag ar 17 a viz gouere 1942.

« D'an aotrounez komiserien [...].

Pariz, d'an 13 a viz gouere 1942.

Ar galloudoù ac'hubiñ⁽²⁾ o deus divizet harzhañ⁽³⁾ ha tolpañ lod eus ar Yuzevien estren. [...] [An urzh-se] a sell ouzh an holl Yuzevien estren, pe paotred pe merc'hed, gant ma vint etre 16 ha 60 vloaz. Ar vugale dindan 16 vloaz a vo kaset da-heul o zud.* [...]

Sevel a reoc'h strolladoù harzhañ. E pep strollad e vo ur poliser en e wiskamant hag unan all gwisket e sivil pe un enseller eus Burev an Ditourerezh pe eus Polis an Torfedoù.

[...]

Ar strolladoù e karg eus an harzhañ a renko mont ar buanañ ma c'hellint, hep lavaret re na displegañ hiroc'h. [...] Kirri-boutin a vo lakaet prest evit an dra-se. Pa ho po peadra da gargañ ur c'harr-boutin e kasoc'h anezho etrezek :

- a) Kamp Drancy, evit an dud pe ar familhoù n'o deus ket bugale dindan 16 vloaz.
- b) Ar *Vélodrome d'Hiver* : ar re all.

Evit ar pezh a sell kamp Drancy eo ret bodañ 6 000 den.

[...]

Diwallet vo ar *Vélodrome d'Hiver*, koulz an diabarzh hag an diavaez, gant archerien korn-bro Pariz ha lakaet dindan o c'hiriegezh.

Rener polis kêr, Hennequin. »

Mammenn : dielloù polis, bet tennet e-maez evit un diskouezadeg aozet gant ti-kêr an III^{vet} ranngêr Pariz e 2012.


(1) *Circulaire (administrative)*

(2) *Les autorités occupantes*

(3) *Arrêter*

* *E gwirionez e oa bet rafl et an holl Yuzevien, koulz gall evel estrañjour, hag eus kement oad e oant.*

Diell 2 : Hentoù pennañ charreadegoù* tud deportet etrezek Auschwitz e-kerzh an Eil Brezel-bed



Goulennoù

Diell 1

1. Diwar al lavarenn islinennet, displegit penaos e oa an traoù e Frañs e 1942.
2. A-enep piv eo bet savet ar c'helc'h-lizher ?
3. Gant sikour an diell, deskrivit petra eo ur rafl.
4. Diskouezit penaos e kenlabour servijoù ar Stad c'hall gant an ac'huberien.

Diell 2

5. Displegit perak n'eo rafl ar « *Vel d'Hiv* » nemet ur prantad er bolitikerezh nazi lakaet e plas en Europa e-kerzh an Eil Brezel-bed.

Poelladenn 2. Mestroniañ a bep seurt doareoù evit prederiañ hag ober gant merkoù er spas (20 poent)

1. Pennad frammet

GEOGRAFIEZH – Luskoù tiriadel Frañs a-vremañ

En ur gemer harp war ur skouer bet studiet ganeoc'h en ho klas, savit ur pennad frammet un ugent linennad bennak evit diskouez aozadur ha luskoù un tolead-kêr bennak e Frañs. (13 poent)

2. Kompren hag ober gant un doare all ; ober gant merkoù

GEOGRAFIEZH – Tiriadoù tramor Frañs


Mont da bajenn ar **stagadenn niverennet 7 war 7** (7 poent)

- a. Lec'hiit ha skrivit anvioù an tri meurvor er skouergornegoù savet war ar blanisferenn.
- b. En daolenn ar stagadenn, savit ur bir da liammañ pep tiriad tramor ouzh e veurvor.
- c. Lec'hiit ha skrivit anvioù daou diriad tramor eus ho choaz war ar blanisferenn.
- d. War ar blanisferenn, livit linenn ar c'heheder ha klokait an alc'hwez.

Poelladenn 3. Ober gant barregezhioù liammet gant an deskadurezh moral ha keodedel (10 poent)

Degouezh pleustrek : Engouestlañ* ar geodourien e buhez o c'humun

Diell : Folenn displegañ ar budjedoù divizet gant keodedourien kêr Floirac



En 2017, la Ville a choisi de réserver 100 000 € du budget municipal pour financer la réalisation de projets émanant directement des citoyens.

Au travers des budgets participatifs, la municipalité favorise l'implication des habitants dans la vie locale.

Quel type de projet proposer ?

Exemples de projets recevables :

TABLE DE PIQUE-NIQUE, BANC, CANDELABRE SOLAIRE, ARCEAU À VELO

Nous attendons vos propositions !

Pour être éligibles, les projets doivent :

- ① présenter un intérêt général
- ② agir en faveur de l'amélioration du cadre de vie
- ③ porter sur le domaine public communal ou métropolitain et correspondre aux compétences locales
- ④ respecter les principes fondateurs de la démarche participative locale
- ⑤ s'élever à 25 000 € maximum

VILLE DE FLOIRAC

Le budget participatif en 5 étapes

Etape 1 : j'ai un projet pour ma Ville
Dépôt des dossiers du 30 mai 2017 au 15 septembre 2017

Etape 2 : je travaille mon projet avec la Ville
Ateliers de co-construction des projets du 30 mai au 20 septembre 2017

Etape 3 : le Comité paritaire analyse les dossiers
Le Comité paritaire analyse la faisabilité des projets du 15 septembre au 20 septembre 2017. Les projets éligibles sont présentés et proposés au vote des Floiracais.

Etape 4 : les Floiracais votent
Les porteurs de projets éligibles sont conviés à présenter leurs propositions aux Floiracais lors d'une Agora. Période de votation du 20 septembre au 30 octobre 2017.

Qui peut voter ?
Les résidents floiracais âgés de plus de 9 ans peuvent voter pour 4 projets.

Etape 5 : le Conseil Municipal entérine les choix
Mise en œuvre des projets du 7 novembre 2017 au 31 janvier 2018. Les travaux peuvent commencer.


* *Engagement, engager*

Mammenn : Lec'hienn kêr Floirac diwar-benn kuzuliañ demokratel ar geodedourien : <http://www.ville-floirac33.fr/la-democratie-participative>

Goulennoù


1. Gant piv hag evit piv eo bet savet an diell-mañ ?
2. Piv a c'hell kinnig raktresoù ? Ha piv a c'hell votiñ ?
3. Displegit petra a glask kêr Floirac ober ?
4. Menegit daou stumm all eus engouestlañ ar geodedourien er vuhez demokratel.
5. Mont a rit da welet tud ho karter evit goulenñ ganto en em engouestlañ e buhez o c'humun. Savit ur pennad evit lakaat anezho da gemer perzh.

(Arabat deoc'h sinañ pe reiñ da c'houzout piv oc'h e stumm ebet, na menegiñ anv ho kumun.)



Stagadenn da reiñ e fin an amrouenn

Da lakaat e diabarzh ho kopienn – Arabat skrivañ an disterañ sin war ar stagadenn (nag anv, na sinadur...)



Savit ur bir da liammañ pep tiriad tramor ouzh e veurvor en daolenn-mañ dindan.

Martinik	<input type="checkbox"/>		
Reunion	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>	Meurvor Atlantel
Gwadeloup	<input type="checkbox"/>		
Polinezia C'hall	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>	Meurvor Indez
Mayotte	<input type="checkbox"/>		
Gwiana	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>	Meurvor Habask